

CANTIC

SANT SÉBASTIAN

I

O sant Sebastian Merzer,
 E peb moment, e peb amzer,
 Hon diouallit, Patron eürus
 Diouz an holl glenvejou spegus

II


Merzer santel, hiviziken
 Hon diouallit diouz ar vosen,
 Hon deuz marteze meritet
 Ni holl kouls hag hor mignonet.

III

Pareet ho peuz Zoé, hag hi mud,
 Pebez galloud, pebez burzud!
 Ha da Nicostrat he fried
 Iac'h ha seder eo bet rentet.

IV

D'ar verzerien en ho frizon
 O peus roet kals ners kalon
 O prometti da bep merzer
 Etrusdet hir evit poan ver.



V

Er brezel a reomp d'ar pec'het.
 Bezit en hor c'hever bepred,
 Epad hor buez hon diouallit,
 Dre ho kalloud, dre ho mirit.

VI

Pa zeui ar maro d'hor gervel,
 Oh! deuit nenze, merzer santel,
 D'hor c'has da balez an Dreindet
 Da gaout ar Verchez benniget.

VII

Grit, pa deuiio fin hor buez,
 Ma vezimp leun a levenez,
 Ma zeimp gant an holl verzerien
 Da velet Doue da viken.

VIII

Grit, dre ho pedennou santel,
 Ma zeio an anaon fidel
 Da veuli Doue deiz ha noz
 En huelled ar Baradoz.

IMPRIMATUR,

Quimper, le 4 Aout 1897.

E. FLEITER,

Vicaire général.